

Enskrivañ

Evit piv : kement den c'hoant gantañ mont war miche-
rioù ar c'helenn divyezhek : skolaer, AESH, AVS, ATSEM,
kasour, penngasour...

Gant DIWAN pe ur skol divyezhek all.

Barregezhioù rekis :

Bezañ bet er sesion 6 miz gant Kelenn pe ne vern
peseurt aozadur all (reiñ un testeni a-benn neuze). Pe
gouzout trawalc'h a vrezhoneg da gemer perzh, priziet e
vo ho live da-geñver an emgav.

Enskrivadur: a-raok dibenn miz C'hwevrer, **betek ma
chomo plas.**

Priz : 3250 euro. Meur a seurt skoazelloù a c'hall bezañ
diouzh ma vez kont gant ar stajiad. **. Sellit ouzh ar roll
prizioù war lec'hienn Kelenn.

Darempreduster : m'ho peus diaester pe ziaester, deuit
e darempred ganomp.



Doareoù enskrivañ

1- Lizher displegañ ho raktres micher da vezañ kaset da
gKelenn, ho CV e brezhoneg da-heul.

2- Emgav e gwir pe a-bell gant ar bodad kadarnaat an en-
skrivadurioù.

Disoc'hoù

100 % eus hor stajidi zo laouen-tre.

Da-heul ar stummadur « deskiñ brezhoneg... » he deus
bet Claudine ur post divyezhek publik ha laouen eo hiziv
an deiz o labourat war-dro ur c'hlasad skol-vamm.

Gaëlle, diouzh he zu, he deus divizet kenderc'hel gant ur
master 2 e Kelenn evit kelenn en ur skol Diwan.

Anne-Claire, he deus adkroget gant he labour en ur ge-
vredigezh da vuheziñ atalieroù evit ar vugale e brezho-
neg.

100 % eus hor stajidi o deus tapet al live C1 gant an DBY e 2024.



Titouroù :

KELENN

3 straed Vañde / 3 rue de la Vendée
29000 KEMPER
02 98 95 55 99 - kelenn@kelenn.bzh
www.kelenn.bzh

* sellet ouzh al lec'hienn.



Gant skoazell :



Stummadur brezhoneg 3 miz donaat

Stummadur dibar
« deskiñ brezhoneg
evit
micherioù ar c'helenn
er skolioù divyezhek »



Formation spécifique
« apprendre le breton
pour les
métiers de l'enseignement
en école bilingue »



kreizenn stummañ DIWAN
centre de formation de DIWAN

Sesion donaat - 3 miz

Eus ar 26 a viz Meurzh d'an 26 a viz Even 2026

e KELENN e Kemper,

Kinnig a ra KELENN ur stummadur 3 miz donaat evit an dud deuet c'hoant ganto mont war micherioù ar c'helenn divyezhek brezhoneg-galleg er c'hentañ pe en eil derez pe bezañ degemeret e Master MEEF-EBI KELENN.

Al live a glasker tizhout da nebeutañ da fin ar stummadur eo live B2 an DBY (DCL)*, gantañ e c'haller mont war hini pe hini eus ar micherioù-se pe bezañ degemeret e Master danvez skolaerien Diwan (MEEF-EBI) e KELENN.

Eurvezhioù stummañ : 420 h.

Eus al lun d'ar gwener : 09:00 - 12:30 / 13:30 - 17:00.

Ar peadra goulennet digant ar stajidi : paper, kreion.

Ar peadra teknikel kinniget : ur sal glas, ul levraoueg (brezhoneg ha pedagogiezh), dafar urzhiataerezh, dafar kleweled.



Danvez ar stummadur

Modul deskiñ brezhoneg

Implij pleustrek eus ar yezh komzet ha skrivet.

Prientiñ an DBY (DCL)*.

Priziañ : - dre gomz dibaouez ;
- priziadennoù dre skrid e-kerzh ar stummadur ;
- arnodenn dre skrid ha dre gomz e dibenn ar stummadur.

Modul degas diazezoù ar c'helenn danvezioù skol e brezhoneg

Studiañ degouezhioù da implijout ar brezhoneg da yezh kelenn eus ar skol-vamm d'al lise. 6 danvez skol a vo pleustret evit ar sesion-mañ : pledet e vo gant ar varregezh yezh, implij an dafar kelenn, an derminologiezh...

Priziañ : arnodenn dre skrid e dibenn ar sesion.



Teuliad studi — sesion donaat

Sevel un teuliad labour stag ouzh ar c'helenn e brezhoneg.

Priziañ : danvez an teuliad ha difenn an teuliad dirak ur juri.



Stajoù evezhiañ : 2 sizhunvezh

Graet e vo ar stajoù e skolioù Diwan pe divyezhek eus ar c'hentañ pe an eil derez. Stajoù evezhiañ e vint ma klasko ar stajiad kompren gwelloc'h implij ar brezhoneg er c'helenn.

Pourchaset e vo lec'hioù staj deoc'h gant KELENN.



***Diplôme de Compétences Linguistiques** (niveau A1 à C1). Examen à l'issue de la formation.

** **Aides financières** selon le statut et le projet professionnel du stagiaire.

Veuillez nous contacter pour plus de renseignements : 02 98 95 55 99

www.kelenn.bzh : Brezhoneg dindan 9 miz / Le breton en 9 mois.



Lec'hienn Kelenn - Brezhoneg dindan 9 miz.

Bremakeat d'ar 20/05/2025